

ABREGE

AR VARN GENERAL PE AR JUGEAMANT DIVEZA

Var an ton ; *Separation an ine deus ar c'horf,
pe un ar sermon*

SALUD dec'h humblamant a ran, auditoret ;
Iscus a c'houlennan pa nen don studiet,
Da ray dec'h eur boquet a deu demeus ar gloar,
Eun abrege tennet deus ar Varn General.

Ar sin demeus ar groas eun de a apparisso.
Pa zeui er fin ar hed Jesus, on guir Otrou.
Evit fouilla ar guer deus a Jerusalem,
Men fel din lavaret on inco eb qu'en

Compagnunes santel vertuus a meulabl,
Glac'har so em c'halon o tonnet d'o quitat,
Pa zeuan da sonjal en o fidelite,
O c'heus hed d'en seleo en duran an tri de.

Men voar nen de quet bed eloquant om c'homse,
Evel ma ve gleet da declami verrio,
En eur compagnones santel a vertuus:
Evit an actoret me a c'houlou iscus,

Groed on eus on possubl a laquet on ol boan
Da essa contanti sperejo pep unan
Men garge e mije sperejo an Eles
Da gontanti peb-unan herve e volantes.

Men voar, assistantet, noc'h quet c'heas contant:
En fin peb tragedi voar custum da gaet
Eur boquet spirituel memous aon so em c'halon
N'en don me incapabl a ze en hep feson.

Tonnet e meus dar sort gant ar re savanta:
Allas! hoc eo digoet gant an ignorant,
Re se, compagnones, mar deu din dea troublet,
Næ nevo quet dre ma faut, rac se ma iscuset.

A B R E G E

Ne on quet eals a dra native studiet
 Da barlant eur mister vel so din digouet:
 Nemerdoc'h, ma Doue, ennoe'h e meus fiars,
 Ebars en o c'hano me a ya da goumans.
 Speret sacr a santel, prosternet dan daoulin,
 M'o pet da rei o cras d'o serviger indign.
 Da dont da rapporti ar pes so guirione:
 A ze omp assuret, guelec vezo eun de.
 Cheffo deus an Illis, da Zoue ministret,
 A gant ar re pere ar gouvernament so roet
 A quement a observ lezen ar gutr Doue.
 Tud dimet, tud yaouanq, ac ive bugale.
 Bugale e zomp ol da Grouer ar bed-ma,
 Deus a ligne Adam ac o briet Eva.
 Hep respecti hini na nep sort qualite,
 Ol e credan e zomp mempro da eun Doue.
 Men deu da bresanti dec'h ol evit boquet,
 Mab an Tad Eternel ebars en fin ar bed,
 O tisquen eas an ev ac e groas dirazan
 Da varn ac hanomp ol ar vsac'h divezan.
 Mab Doue pehini so deus voar ar bed-man,
 Incarnet er Voerc'hes, dre c'hras ar Speret-Glan,
 A seui serten un de da varn en generalman
 Quement den so er bed, dre eur setans finalo
 Deut d'ent em consideri ac e n'em arretet,
 Rac ret vo dimp beannet demeus a bec'hot,
 Pe na antreomp gant en ev certainant;
 Rac se, me o supli, bevomp honestamant.
 Chetu aman ar sujet demeus ma entrepris;
 Compagnones santel, bezet ol attantif.
 Moyen gand grace Done, me laro pen-da-benn
 Ar signo bras a vezo quent evit fin ar Varn.
 Ma ve nin, a sonje, ebars en on c'halon,
 E lequafem, on foan d'ober reflexion,
 Nis defe da guitat a grem on pec'hejo
 A da ober pinigen demeus on ol fono.
 Pa sonjan om speret dan devoes terrub-se,
 E renquatr apparissa dirac ar Vajeste
 Deus a Varn ar bed da rentan contdean;
 Vel ma lavar ar Prophet, gant eston e crenan.

Ar Sent ar re vrasan memous ar Vartiret
En o brassan poanio voant mui tourmantet,
Crenan ra o c'halon o tonet da sonjal
En devoes terrub-se deus ar Varn-General.
Pa eo gant cals a boan ar re justan salvet,
E me ar Pab Innocant, petra a vezo gret
En treomp pec'herrien, en durant on bue
On eus ni tremenet o c'hoffansi Doue?
Bremen me laro dec'h, vel m'e prophetiset,
Ar signo a apparisso quent evit fin ar bed,
Me o pet d'o seleo gant humilite a silans:
Me a ya d'o expliqua ebars en o presans.
An Antechrist a deui ebars en fin ar bed,
Eur map da Lucifer partout evit presec,
Presec rei eul lezen contrel d'ar guir Doue:
An nep nen credo quet a gollo e vue.
Inventi rei p'anniou evit dont da spontan,
Ar re na deuiont quet da distrei gantan:
Sivoas! cals a dud, gant spont deus e clevel,
A credo d'e lezen a vezo ol collet.
Ar Prophet Elias, mignon bras da Doue,
A deui da bresec e enep d'e volonte,
Da gonjuri ar bobl da dere'hol mat dar fe
A da soufr ar maro quent renous da Zoue.
Brezel ac ar guernes ac ive ar vocen,
Assembles e vezo an teir goalen o ren;
Ar guernes a vezo quen terrubl er vro-man,
Quen a zeñ gant famin an dud da disec'han
Argoad em goazio e deu d'en em lassa
Pa deuan da sonjal en devez terrubl-ma
Rac cals demeus a dud neuse e soueto
Gant an trubuilho bras e ve fin d'o deho.
Quement vo en disurs, betec al loenet mui,
Gant mojo glac'harus e epouvanto tut
Ac a laquai ane ha done! da sponta
Betic memensamant an inia hardia,
An eol gant nec'hamant a vezo eclipsot,
Epouvantus dan ol e vezo da voelet;
Ac al foar a vezo quen ru evel ar goal:
Honnes a vezo eun amzer a vo considerabl.

Ar steret a goeo demeus ar firmamant.
Ar mor en fulor, gand eun drous epouvant.
A c'hourdrous dre e ves dont da longua an douar
A qnement so ennan ebars en general.

Conde quement-se tout vo guelet rapportet
An tan demeus en ev gant Doue digasset,
A devo en eun instant quement a vo voar ar bed
Ep respecti netra en poult vesonti dewet.

En eur memeus instant ar bed universel
A vo pé commandet expres gant eun Arc'hl,
Dre an drous an drompill donnet da sortian
Demeus o beio evit apparissan.

Sortiet deuz ar be a quietet an douar,
Savet, corfo, a neve, arri eo ar Varn general
Ma vo ret rentan cont en presans o C'hrouer,
Da gonfirman an arret deus ar varn parti culier.

Roue an ol Rouane eo a deu da c'hovel
Ar'bed antieramant, ep dont da dale pel,
D'e n'em bresanti ol ebars en eun draouien
So hanvet Josaphat, ep laquat quen termen.

Evit expliquan dec'h an het ac al lec'het
So en draouien-man, Josaphat eo hanvet,
Pemb cant pas het, tri c'hant a ledander
So bars en draouien-man, ar scritur a verc scler

Ebars en draouien-man e weler a hirie
Ar form eur gador wen, el lerc'h guesal
Roet enni ar setans da vëan condanvet.
Voar venes Golgota e vëe expediet.

Ar maro a deu beman da bresanti sevel,
Trubuillet gant esclam, o clevet moës an Ael
Pini a vo clevet dre'r bedantieramant.
Bete peuns an ifern, bras, en crei an tourmant

Eur brut an terrupian pini a lar dime
Dont da n'em unissan breman gand ma Doue.
En despet did eo ret donnet da sortian:
Crenan a ran gand eston o tont d' apparissan.

Dirac an daoulagat deus a Varner ar bed
Ar mor ac an douar ol en neus-ing formet
An ol astro en er, ar steret ac al loar,
An eol er firmamant, ol e maint en glac'har.

Ar mor en eun instant a rento ar c'horfo
A so enni beuzet, tout en o c'hassamblo.
Ac an douar ive quement so interret
Ennan, aboe ma seo gant eun Doue crouet

Evit o assemblu eu draouien Josaphat,
Tud santel, pec herrien, a tud a heb sort stat,
Da c'hortos ar Barner pa zisquen deus an en
Da jugi pepini nerve stad e vue.

O Doue! ma breudeur, heman vo eun devoes
Ma comprenfomp ennau nin na bec'hfemp james
O voelet separi an eil deus eguile
Gant eun Ell tout expres, dre ordrenans Doue.

En tu deo a vo laquet ar c'horfo triomphant,
Brillantoc'h vit an eol gant e air eclatant,
A neuse en tu clei e vo ar pec herrien
Tefaloc'h evit an nos gant e zefaligen.

Hennes ve, ma breudeur, ar separation
A laqual ar pec herren desolation,
Maniret gant ar glac'har o voelet en deus bet
Grasso digant Doue ac e nous negliget.

Malheur d'imp, e meze, chetu ni er voea-man,
Arri eo ar termen n'ellomp mui resistan,
Ma veon p condavnet het an eternite
Dar flamo devorand gand guir vap eun Doue

Chetu ar re a moamp evite meprisans
En tu deo laquet ebars en assurans;
Nin, o fiout re er bed ac en e vanite
O cael re a estim vit ar mondanite,

Maneio deus ar bed deut d'en em digneri,
Garecq queet vearnomp vit on assomi
A te, maro grevus, deus don aneantissa,
D'on laquat en ludu na c'hefomp da netra,

Neuse e tisquenno ar Barner deus an en,
Ac e accompagnet gant eun nombr a Æle,
A Sænt, a Sænteset, Prophetet, Ebestel,
Sperejo evurus a nombr a dud santel.

Aviset christenien, sellet deus ar pentur
Ar poltret a Jesus, Salver Redemptur,
O tisquen deus an en er bed voar eur goabren
Evit donea da varn an oll universel.

Chetu, ma breudeur, ar boquet greabl
Am boa hirrie an de da laquat ac o laoulagad
Me o ped'gand humilite da donet u'en compren
En anno Jesus-Christ, ar Barner souveren.

Ol fleurio ar bed deus an douar a sey,
Mæs homan, ma Breudeur, a den demeure a nev
Rac se, me a c'houten, pa oc'h en o silans,
c'houi so preparet a pur a ronsians,

Evit dont da reserv eur boquet quen divin,
Pa jonjomp neuboutan on boan evit fin,
Pa zeuio ar maro ar fin deus on bue,
Rac entre o saou dorn rentfomp hon ine.

Rac se, compagnones, men deu do supplian
Da regli o pue en queit a ma vaet voar ar bed-
Ar maro so subtil ac a dosta bepret [man :
A soupren cals a dut ac a ve en yec'het.

Men deu do conjuri en anno ar guir Doue,
Dont da laquaat urs vat ebars en o c'hine,
Rac ar Varn general na rei nemet confirman
An aret a recefomp en on eur divezan.

Me gare caet eur voes a ve quen eclatan
Ma c'half'e clevet partout dre ar firmamant,
Men a avertise ar bobl ebars en general
Da netaat o c'honsians a ben an de final,

Jeremy ar Prophet guejal a lamentet
Voar guer Jerusalem a partout en Jude,
Pa veete dorn a coler demeure an Eternel
Prest do reduisan, do laquaat en miser.

Men a ra dec'h ive ar memeus avertissamant
Da n'em brepari ol voar ben ar Jujamant
Ma c'helfomp gant fiars dont da apparissan
A neuse en tu deo donnet de n'em blassan.

Breman me a expliquo dec'h vel ma eo mar-
Gant an tado santel el lezen ancien, [quetscler
Ar selans redoutabl a vezo prononc
Gand mab an Eternel ebars er fin ar bet.

Evel ma vo ar Barner asset, vo guelet scleramant
Ar pec'hejo cuset, neuse memeusamant,
E vezo gant rigueur venget deuz aneze,
Ep respecti nicun, men a bromet dec'h se.

Peb hini a renquo en de se perillus
Respout a renta cont en presans ou Jesus,
Produet vo ar grasso al juget peb hini
Dar joa pe d'ar flamo het an eternite.

Perset vo ar c'hristinou en rigeun ar justis.
Examinez or foto, mesuret ar valis,
Trempan rei e goler en goad ar pec'herrien,
Se a rei de disqui bars anstan an infern.

Ar monstr bras Lucifer, souverèn an infern,
N'em bresanto eno la gantan e gac'hier,
Pini a rento preav arguement a neus groot
Enep an decq gourhemmen a so dimp comman

Chetu lass ma c'hac'hier, Barner ar virione,
Examinez breman ar sad deus e vue:
Ne c'houlenan netra ma ne neus din gleet
Autro o couir dech ma hini hin dre droet.

O Jesus, ma breudeur, pebeus devez redoutet!
Guelet an Æle memeus, tout int spouronet
Ac an ini so en infern ar muia sur ple
Dirac ar Barner bras a deuio da bresec.

Ar Voerc'hes glorius a beniguet meur bet
A vo enno neuse ac e daou dorn juntet,
A hi prest da glevet rei ar setans divez an
Da ol ligne Adam comprenet p'o pedan,

Da guentan ar Barner gant eur vijag joaus,
O tristei en ta deo eus ar re evurus,
Dre gomso familier deze e lavaro:
Deut, tud biniguet, deut gaee dan evo.

C'houn sobet en o pue guir jervigerien vat,
Queit a ma voac'h er bed, a dime a dam Za
Evit o recompans e veet curunet
Breman ebars er gloar, en pales an Dreindet.

En andret ar bevien c'houi so bet charitabl,
Roet d'e analusen demeure a galon vat,
Ous o naon o poa bet roet de da zibri,
A roet de dallet vit en em soulagie.

O tistrei en ta clei e parlant evellen,
Herve raport ar scritur ous al lezen ancien:
Me zo la neve deus an ev disquennet,
Soufret poane vidoc'h ma vijac'h bet

Souffret en boa ive maro a passion,
Exposet en eur groas da bac'a or ranson;
Ma vijac'h bet fidel da huil ma gour'hemen
E vijac'h curmet en ev evit biquen.

Roet en boa en o toes ma Frédicatoret,
Covesourien santet a ma guir vignonet,
Da gaët an absolven demeus o pec'hejo,
Pa deujac'h do diaet gant quun en o calonô.

Touër, blasfemateur deus ma c'hano santel,
En durait da vne, deus barbar a cruel,
Ate o c'hout eun de a c'harige
En renjes qrentan cont e presans eun Doue.

Transgresset e teus bet ma oll gour'hemenno
O tont da vomissa dre goler blasfemo,
Ouspenn e c'hout bet c'hoas guelexemples pue,
O sacrimallojo dirac tud da gontre.

Usulier miliguet, pelec'h e man ar gaj-se
Deus ar mado las poa bet, lavar brema dime?
Den lach, den iyen, deus a galon en mandret ar
O tont da rapinet digant e o moyen. [bevien,

Mens o bet esty alias quea affliget
En personnegion paour o elase ma sami q boet:
Te deus bet ar galon da dont d'am refusi:
Deus da anaon breman me deus de n'em venji.

Tud pinvidic, me o ped, sonjet en quemen-man;
En silaps un Doue, de ar Varn divezan,
Enep an tud ingrat ac an usullerien
A refus o miado da souten ar bevien.

Den jubric miliguet, rent di brema cont,
Gant da actiono te voa buon a pront,
Da glasq ar plasso secret da dont da gommetti
Heuil da bassion vil evit dont da bec'hi.

Te a jonge dide den ne vouige biquen
Netra a gusmen-se deus an nep a voa o ren,
Mes breman ar bed ol a voel da bec'hejo,
Evit da recompans te souffro ar poanio.

Den gourmant obstinet, te garie ar cheriou mat,
Pilhaer hosteleri, a te o e'hout er fat
Penos ar gourmandis a voa eur pec'het marvel
Avige punisset dre ar poannio cruel.

Bars en hosteleri enno e voa da blas,
O tibri, o c'hefa, memeus en deio bras,
Pere a moa consacret evit ma servigi:
Te teus ing impliet evit dont da bec'hi.

Mes arri eo an de na elles mui tec'hel;
Men venjo ac'hanout breman, den criminel;
Elec'h da cherio mat te po naon a sec'het.
Te a soufro poanio a vezo diremet.

Tud lach a dieus da sont d'am serviji,
A herve ma lezen manquet da n'em regli,
Da c'heuit an offiso pere m'oa commandet;
Guel voa ganet c'heuil an danso miliguët.

Tud yaouanq, me o pet, sonjet en quemen-man
C'hui gar an ebato, eno man o c'holl joa:
C'heuillet o gouspero ive oc'hofern bret,
Lest an assembleo pere so difennet

Rac profani ar sul consacret da Doue,
Unan ar seis pec'het marvel eo ar re ze:
En de se, de ar Varn e veet condamnet;
Evit soufr ar poannio a vezo diremet

Ar seis pec'het marvel ar ze eo ar pinno
Pere agas an dud dreize an ifernio,
Rac-se mo supplian balamour da Doue
La ober pinijen a chanj deus a vue.

Goude ar reproch-man gret gant gouir Doue
A enep ar bec'herrien, e prononso goude
Ar setans redoutabl gant un er golerus:
Pelled divoui-me breman, c'hui ol dud malarus

AR BEC'HERRIEN.

Pellec'h eta, Barner, o vezom exilet
Dre an arret o c'heus n'on enep prononcet:
En pes corn deus ar bed e vezo on prison.
P'and'oc'hui a gommant dimp-ni, Barnerguirion?

DOUE.

O prison a vezo eu creis fons an douar,
En eur plas na voellet nac an eol nac al loar,
A n'o pezo enno a nep sort sclerigen
Nemert an nos antier, leun a defaligen.

AR BEC'HERRIEN.

Pe sort poan a soufrou eno ta ma Doue,
Pa omp forbaniset dirac o majeste?

Tec'hel deus o presans a so dimp eur boan vras
A bean exilet a dinac de meus o pisach,

DOUE.

Ar poannio a souffret n'o pezo quen partach,
An tan deus an ifern a vo ho heritach;
Ar mel en o c'hesquern a deuio da viryou,
Gant ar riguer deus an tan o oudnet d'o devoiiv.
Ar n'o pezo enne quen boet n'a quen breuvaj
Nemert naon a zec'hel en creis ar poannio bras,
Gant an amprefanet, sourdet a tousaget,
Gant erret furius en tan se devoret.

AR BEC'HERRIEN.

Mes, Barnersouveren, p'an de ret dimp soufr poan,
Dre eur setans prononcet devoi ebar en tan;
Da vianna eta na vezo fin abet
Goude un nombr blavejo er poannio diremet

DOU.

Nan, biquen na finis o poan nac o c'hanquen,
Entre vo tri ferson et eun Doue o ren;
Eternel o vezo o poan ac o tourmant,
A viquen o chompfet en tan se languissant.

AR BEC'HERRIEN.

Penos eta, Barner, chom biquen da lisquin
En creisan tan ardantep dont da gonsommi!
Dre ar riguer deus an tan c'hellom bean devoet,
Hep dale pel amser bars en ludu rentet.

DOUE.

Biquen na gomsomfet had an eternite.
Bopret veet en o pes o souffr ar poannio-se,
Chom a refet antier en tan-se languissant,
Hep ma teui da verrat eur momet o tourmant.
Pebeus eston a cri na onfe den compren
A rei an iueo a ielo dan ifern,
O laret adieu d'ar Voerc'hes a de mab,
Cri e vo ar galon ma na deu da dristat.

AR BEC'HERRIEN.

Adieu eta, Jesus, gand eur voes lamentabl
Adieu ta evit biquen, n'en oc'h polloc'h on Tad
Dre an arret o c'heus n'on enep prononcet,
Adieu ta evit biquen, ret vo bean danvnet.
Adieu, Guerc'hes Vari, Rouanes deus ar gloar,
Adieu, ni renq mouet da gomans on glac'har!

C'houi a voa evidomp bopred avocades
Ma vigemp bed fidel d'o pedi, Rouannes.
Adieu dec'h oll, Sent demens ar brados,
C'hui ya breman dar gloar, dar pales, da repos
A nin na nomp biquen nemert poannio sanglant
Hep caet eur monnet deus a soulajamant,
Adieu dec'h, tensor caet deus ar gloar eter
Nin on eus o collet dre ar pec'het marvel;
Malheur dimp ni biscas ma voamp ni deut er bet
Pa eo ret dimp disquen en infern diremet.
Chetu aze ar portret deus ar Varn divezan,
Ario un de pa sonjomp nebutan:
Na eller quet doeti anez renons dar feis
Pa eo guir eo laret dre halo un Doue.
Jesus, Roue ar gloar, c'hui vo ta ar Barner;
Nin o ped da rei dimp grasso particulier:
Da c'hanch deus a vue quent mont divoar a bet
A da ober pinigen demeus on ol pec'het
Guerc'hes gloius Vari Rouanes an Elles,
Nin o ped da sellet ouzomp deus a druez;
Bed evidomp bopret avocades fidel,
Procuret ma c'hefomp dar jaio eternal,
O Sent a Sentezet, mignonet da Zoue,
Intercedet evidomp diran e vajeste,
Evit ma momp ar c'hras un de da n'emvoelet
Ebars er Barados, en pales an Dreindet.
Adieu, compagnones, me deu da c'houliscus
Digance'h assambles ha digant va Jesus.
O requeti dimp ol demeus a galon vat
Ma veomp en tu deo en troien Josaphat.
Birviquen, mien assur, an avantach n'on bo
Da n'em gaet assambles quen a vesoenno;
Adieu a laran dec'h, dre eur guir garante,
Men a souet dec'h ol ar peoc'h a heurs Doue,
Ar peoc'h, an union, hennes eo ar fleuren
So ral en amser-man en mescq ar Gristenien
Nemert leodouet a detractiono;
Lec'h ma queret, en quær, er paroujo,
An detraction, ar guel deot miliguet,
A laqua desunion partout ebars er bet,
Dre ma ze un arme bulumus en infern blerumet,
D'e dispen a bejo on Salver biniguet.

Cousquoude, ma breudeur, ma raemp reflection
Voar an dec gouc'hemen a roas Roue an tron
Dar prophet Moïsas, voar diou dolen ven taillet,
Ebars en tentur aour hi a voa raportet.
Ar guentan taulen a gommant caret Roue ar gloar
Dreis guemen tra a so crowet voar an douar,
An eil a gommant dimp ol e n'em garet
Pa omp dre memeus goat gant Doue unisset.
Mes en plas ar modesti gant Satan so laquet
Evit decora coms al leon milignet,
Evel ar faltesto a enep or Salver
Eus en accus gueajal dirac Pilat Barner.
M'en deu da laret dec'h evel sant Ian Badezour
O coms deus faltesto Herodes, den traïtour;
Lingua andeam san Judea Dominus
Teulet plai, Christenien, rac ar Barner so just
Allas! ma breudeurques, mar quaremp ni compren
On bue er bed-ma ne nemert un tremenaden,
O sonjal alies bare er eternite,
Pehini a bado entre ma vo Doue,
Diou eterniteaso, unan so vertuus
Ac e so preparet vit ar re evurus,
Pere o devo heullet an Aviel,
O tont da pratican or vertuio santel.
Allas! un al so glac'harus da gompren,
Bean da viquen danvnet en creis puns an ifern,
Sonjet en se bemde, liessan ma c'hellet;
Tourmant so en eur plas, en un al joaustet.
Divoar an teat-man me deu da remerqui
An tud a bep quartier deus en em assembl,
Evit retorna han pepini d'egontre;
Doue d'ho conduo bopret dre hent an ev.
Evit pa veomper pors a salutation,
O possedi on heritach en pales Roue an Tron,
Ma torfom on sec'het er feunteun a vue
A desiran dimp ol dre eur guir garante
Da bep tra tout so fin nemert da c'hras Doue,
Rac se, compagnones, men guemer ma c'honge,
O soueti dimp ol ar gloar selestiel,
En anno an Tad, ar Mab, ac ar Speret Santel,

En ty ar Goffik anno Lan-huon.